

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

P'edon em c'havell bihanig

P'edon em c'havell bihanig, P'edon em c'havell bihanig
Me m'oa choazet o lan tigeoñ,
Ur vestrezig lan lu-roñ

Ni a vale bemdez hon-daou, Ni a vale bemdez hon-daou
Unan war droad
Un all war varc'h

An [hi]ni war droad a c'houlenne
Ur pok pe zaou
Digant 'femeleenn

'Vit pokad dit sur ne rin ket
Gant aon e ve[fe]
Tud o sellet

'Vit tud o sellet n'ez eus ket
Nemet al loar
Hag ar stered

Nemet al loar hag ar stered
Hag ar re-se
Ne barlantont ket

P'edont o-daou [o]c'h en em bokad
Aotrou Person
'Oa o sellet

Disul ni 'vezo diskuilhet
En oferenn-bred ("overn-bred")
E-pad ar sarmon

Ni z'ay da gofez da Nedeleg
Evit resev
An absolvenn

Pe vimp absolvet pe ne vimp ket
Da Veurlarjez ("Vouliarjez")
Ni 'vo dimezet ("dimez' ")